

- 121 -

Dastumad Pennwern : dornskrid 89

45. AR JARLEZEN

(follennoù 144 - 148)

C'houi a c'heus klevet e ze roud vad
Klevet eur plac'h e c'houitellat

Maharit Charles a c'huitelle
Hag a deus bet goall chang a se.

o°o

- Me zo groet din evel d'ar c'hi
A zo bet tollet e mes an ti,

Zo bet tollet var ar pave,
Kris vije kallon merc'h na voëlche.

Hag hi o chonjal ober mad
Mont da laeres d'ar c'hoad.

o°o

Er c'hoat pa zeo entreet
Pevarzek forban deus rankontret.

- Mar dan me da laeres d'ar c'hoat
Me a ranko kaout eur gobri mad,

Eur siffl arc'hant da c'houitellat

Pevarzek forban a rankontras
Da vont da laeres da ti he zad.

Hag e mond a lavaret d'he
E vouie an douare gwel evit-he.

o°o

E ti he zad pa int arruet
E voa ed an dud tout da (kousket)

Nemet he breur hena na voa ket
A voa o rei adkoan d'he ronset.

He breur hena e deus lazet
A laket an tan var he ronset

o°o

- 122 -

Ar Charles kos a lavare
De vugale eun deñs a voe :

- Baleomp sioul dre ar c'hoat man :
Va merc'h Maharit a zo enan.

Ne voa ket he hir peurachuet
E ve(r)c'h Vaharit an deus renkontret,

E ve(r)c'h Vaharit ha rankontras ° (komp)
Hag e lazas° var ar plass e la:

Maharit Charles na vouie ket
E voa he zad e devoa lazet.

Ken e voa goelet e vonnet
Var ben eunan ar forbannet.

Ken e voa goelet he gontel
Var an dol en Koat an Drezen.

°°°

Otrou Maner Koat an Drezen a lavare
En Koat an Drezen pa errue :

- Deud on do pedi, Maharit,
Da zond da gomer dam priet.

Maharit Charles a lavare
D'an otrou pa er c'hleve :

- Parlantet sioula ma c'hellet
Rag ar forbannet a zo kousket.

A ma kleffen(t) me ve gourdrouzet.

Otrou Maner Koat an Drezen a lavare
Da Vaharit Charles pa e c'hleve :

- Tollit ho droad var dailler va marc'h
Neuze ni ielo sur a voalc'h.

°°°

Otrou Maner Koat an Drezen a lavare
Er ger de dud pa errue :

- Ma friedik, id en ho koële
Lavarit e zoc'h klan.

- 123 -

Maharit Charles e zo deud aman

Pachik bien ke allesse
Lavar dan archerien dont ive.

o°o

An archer bras a c'houlenne
En Maner Koat an Drezen pa errue :

- Petra zo a neves er maner-man
Mar zon digemenet da zont aman ?

An otrou sur a lavare
Dan archer bras pa er c'hleve :

- Parlantet sioula ma c'helfet,
Rag Maharit Charles a zo tappet.

Iamomp he c'hontellou digant-hi
He siffl arc'hant mar man ive.

- Maharit Charles deomp leveret
A ped paour kes o c'heus lazet ?
Ag a ped denjentil o c'heus laeret ?

- Seiz kontel zo em godellou
Ag an distera deus aneze
Nag a laze seiz den bemde.

- Maharit Charles, deomp leveret
A ped bugel ho c'heus bed ?

- Seiz a meus bet deus va briet
A seiz all deus ar forbanet.

Entre Montroulez a Karhaez
Eus eur puns a zo leun a dres.

Poent he d'he perc'hen dond d'he rinsan
Pevarzek bugel e meus henan.

o°o

Maharit Charles a zo bet
Gwisket deñ eun invis roussinet,

Eun tam koar allumet
A deus ar potenç krouget.

vvvvvvv

Jannet Puill, klasqueres a Henvik, 13 gwenver 1851

vvvvvvvvvvvvv